

Doue desket d'ar Vugale

Andantino.

8N3-4-002



Piou'ra d'an heol bep min-tin se-vel Ken kaer var



gri-ben ar me-ne? Piou'ra d'an noz as-ten he



man-tel? Va bu-ga-le! Dou-e, Dou-e, Dou-e.

Piou'ra d'an heol bep mintin sevel

Ken kaer var gri-ben ar mene?

Piou'ra d'an noz asten he mantel?

Va bugale! Doue.

Piou'n euz livet e glaz an envou?

Hag ar mor braz ken kaer iye?

Piou'n euz livet ar bleun er prajou?

Va bugale! Doue.

Piou ro d'ar gwez kement a zeliou?

Ha, pa gan eme d'ar beure,

Piou zesk d'ar labourz e gantikou?

Va bugale! Doue.

Piou a ro e dra da bep pere'henn?

Nebeut d'unan, kalz d'egile.

Nebeut d'ar spenn, muioc'h d'ar rozen?

Va bugale! Doue.

Piou a laka kalon ho mammou,

Pa c'hoarzit, da c'hoarzin ive?

Da ouela, pa velont ho taclou?

Va bugale! Doue.

Evit o zad hag o mamm jaret,

Pa bed sioulk ar vugale,

Piou a zelaou o feden tanet?

Va bugale! Doue.

Emberr pa vlot eat da gouskat,

Goude 'r beden, en ho kwele,

Piou a gloza d'eo'h ho taoulagad?

Va bugale! Doue.

L. G.